

Chanson ar Guin.

(118)

Var ton ar Filouter fin.

Pebez joa ! pebez levenez !
 Pebez jouïstet !
 Beza mignonet assemblez,
 Duc'h tol azezet !!.....
 Dunnez zo eur gontantamant
 To inexprimabl,
 Hag eur bonheur, sertenamant,
 Douç, hag agreabl.

Rac-se, en em rejouissomp
 Ha gant plijadur,
 Tringomp, ebatomp, hag evomp
 Demeus ar Guin puer
 Deut a Verdoq, deut a Vurdel,
 Hag a Ganary,
 Deomp-ni oll, mignonet fidel, (119)
 Paotret Sansourci.

Ar Guin mad erruet er vro-ma
 Eus a Vazarat,
 A dle hiryo recoqilla
 Peb citoyen mad.
 Guin Reims, Guin Tessi, Guin Chabist,
 Ha Guin Vermanton,
 Oñ eus bet digant Bourdellis,
 En discretion.

Guin Tomner, ha Guin Capertan,
 Guin Casterati,
 Guin Coulanch, ha Guin Frontignan,

Ha Guin Malvoizy,
 A offer deomp en ber amzer
 Peb plijadurez,
 Evit tremen en hor c'harter
 Deiziou Molarjez. (120)

Guin Cahors, ha Guin Ermitach
 Guin eus a Sangon,
 Guin Nedoc, hag en ber langach,
 A Jant-Emilion;
 Guin a Jant-Lorans, a Noder
 Hag a Sapalu
 Hiryo, mignonet, a gaver
 Fregant en peb tu.

Croc-ta brêma, va c'hamarad,
 Croc en da veren;
 Endra bado ganeomp berat,
 Gouêlc'h da gargaden;
 Nemet bep bloaz na ve cavet
 Deiziou Molarjez;
 Chassomp an nec'h eus hor speret,
 Oll gompagnonez.

Trugarecaomp brêma ive (121)
 Nep a ra deomp Guin,
 Hag a rejouis hon ene
 Gant dour ar rejin;
 Ha goude, var un ton joais
 Ha rejouissant,

- Meulomp ar Guin delicios,
Ar Guin excelant.
- Deut eo al lizeri-patant,
Digant Jean-Vourdel,
Da g'ement jeneralamant
Zo dezain fidel,
Da sessi o œuvrou servil
--- tri devoz,
Erit bezza dezain util,
Deiziou Molarjez.
- (122) Pa emomp-ta en hor blijadur,
Hag ep nec'hamant,
Beuzomp oll an displijadur
Er Guin excelant;
Lêzomp an amzer da zonet,
Gouezomp profita
Eus an ini zo e redet,
Hag a rên brêma.
- Lêzomp an evênien suptâl
Zo er vourgaden
Da lavaret ezomp fragil,
Ezomp mêfieryen;
Ar seurt tud-se, var a velan
Ne anavezont get
Ar blijadur zo oc'h eva
Gant quir mignonet.
- (123) Ne gavont mat, var o mena,
Guin quen, na Guin ruz;
Peb liqueur a g'evont c'hoëro,
Pa na vez e curz.
Abil bras int da abeg'i
Qement er c'hef mat,
Hag a ya d'an hostalery
Gant eur c'hamarat.
- Me ra goab eus a g'ementse:
Even en o zy;
- Disclêryet eo al Liberte,
Libr eo peb hini.
Elêc'h m'eo lojet Jean-Vourdel,
Ep distinction,
Mar deus arc'hant en ho cōdel,
It gant ho mignon.
- (124) Lies a vech oc'h eus clêvet
Comz eus a Nœ,
Pini en devoz transplantet
Dre urz a Doue
Ar vinien en e gartier,
Hag el labouras:
D'e zaouarn e tleomp en antier
Eur mad zo qer bras.
- Pa vezan e gout da farsal,
Ha guin em porpant,
E lêzan ar chass da harzgal,
An dud da barlant;
Mes deuet din va êr serius,
Zo din naturel,
E rân d'an dud-se abegus
Prest ha prompt tereh.
- (125) Repetomp eta, repetomp
A greis hor c'halon,
Meuleudi ar Guin a evomp,
Ep coll ar rêzon;
Pedomp erit nep a labour
Er quiniennou,
Ma plijo gant Doue o zicour
En o ezomou.
- Deus ta, nectar delicios,
Banne guin charmant,
Da sclêrat eus ar maleivus
An ententamant;
Deus da devri ar chadennou
A zalc'h va speret
E creiz an inquietujou

162

Zo stag ouc'h ar bed.

Deus.... tèn eus e faralizi,
Va memor cousquet
Evit ma ellin da veuli
Partout dre ar bed.

Te, evel an eol radius, (126)
Pa vez o para,
A zeu, dre da effet nerzus,
D'am vivifia.

Souomp, pinton ha guerenou,
Gromp an traoù diouñh-tu,
Finissa a ra hor joayou
Merc'her al Luedu.

Rac-se, evomp etra' bado,
P'on eus faculte.
Allas! soudou e finisso
Hor prosperite.

Erru amzer ar binijem,
Hag ar c'horairz-dû.
E chenchu ganeomp ar zouben,
Hag oll ar gundu.
Crog adare-ta, Dom-Francez,
En da voutaillat, (127)
Souïetomp d'ar gompagnunez,
Peb' avantur vad.

Monet a ran da finissa
Va c'hamplimanchou,
O tonet c'hoas d'o suplia
Dre va fedenou
Da gaout memor a Van-Vourdel,
Hag eus a Vacchus,
Mignonet a zo qer fidel
Ha qer jenerus.

Credit ac'hanon, mignonet,
Ne qet va dessin
Deseo nep zo fur ha parfot
Da garet ar quin;
An desanz hag ar bropité
A anavezan,
Dreist peb tra ar zobriete (128)
Sur a estiman.

Ne de ma qet em fantarzi,
Qer nebeut ive
Donet aman da abeg'i
Dey eus ar c'hontre.
Peb dey zo hag a dle beza
Mestri d'e zantimant,
Ha peb hini tout er vro-ma
Mestri eus e arc'hant.

Adieu eta, compagnunez,
Qer a vezo bloas;
Mar bezomp-ni bes assambles
Ni a rayo c'hoas.
Pedomp evit conservatiou
Bremân hep farçal,
Neb a ro deomp colasion
Ha deomp da zansal.

fin.

Qret gant Jacques Abalan,
a Blouescat.

(Vol. II, p. 118-128.)